

zell ar relijion, n'eomp ket da greint
 gwel evit kement a zell ar vev. Evite
 n'eus bro ebet. An holl vroioù a fell d'ê
 e vefent laket en unan, p'karet an ar-
 meou, t'c'rrer ar brezelioù sinet ar peuc'h
 etre ar bed-oll. Kemer a laka disparti etre
 an dud e fell d'ê ve dismantret, ar ye-
 zou. ar gouenner. ar gizioù dishenvel.

Eun hunvre p'cunner, eur zorc'henn spon-
 tus dre m'eo stag outi silvidigez an den
 er bed-man hag er bed-all ha silvidigez ar
 broioù!

Petra a zigaso d'imp ar pevar bloaz a
 zo o tont? An diougan anê a zo leun a an-
 ken hag a spont.

Al lenner.

DINDAN AR SPERNEN

(Loreel gant « Kevredigez Breiz »)


CANTABLE MAJEUR




Ar - ru eo ar bleu - niou er sper -



nen, Miz Mae en deus Strinket a -




leiz Aour ha per - lez diouz e gu - ru -




nen War lan - ne - ier ha pra - jou

MINEUR




Breiz Barz er Mae - ziou an am - zer ne -



ve A ro d'an holl, douster du -


MAJEUR DOLCE



di Er Sao-nen peuc'hus klevet e



ve Ar Wazig dour o hi - bou -



di.

Arru eo ar bleuniou er spernen,
 Miz Mae en deus strinket a-leiz
 Aour ha perlez diouz e gurunen
 War lanneier ha prajou Breiz;
 'Barz ar maeziou, an amzer-neve
 A ro d'an holl dousder, dudi;
 Er zaonen peuc'hus klevet e ve
 Ar wazig-dour o hiboudi.

Kement 'n eus buhe war an douar
 'Zo evurus ha seder-bras:
 Al lapousig a richan d'e bar
 Kuzet e-touez ar bojou glas;
 Ar bugel a vousec'hoaz 'n e gavel,

Da c'hortoz e vamm da dostât
 Hag an ael bihan esa sevel
 'Vit ober allazig d'e dad.

Dre ar c'hoajou, eun aezennig flour
 A red, gant c'houez-vad ar balan,
 En eur luskella war veg ar skour
 Ar voualc'h hag al laouenan;
 Evel d'ar maner, d'al lochen blouz
 An heol a ro e vannou koant;
 Ar varzed el liorzou didrouz
 A gan war o zelen arc'hant.

An dud yaouank a ve evurus
 O welet goude ar gouanv,
 Dindan tomder an heol lugernus,
 Er wenojen ar bleuniou hanv:
 Kalon tud Breiz 'zo bepred fidel
 Hag o c'harante 'zo tener;
 Met, siouez! koulmig ha turzunel
 'Ve diskaret gant gwall-amzer.

Deiou levezet 'barz ar bed-man
 A dremen 'vel eul luc'heden,
 Evit rei lec'h d'ar poaniou brasan
 Da beurfrailha kalon an den;
 An Ankou digar ha didrue
 Ne zell ket ouz muian-karet:
 E-kreiz o nerz, war hent ar vuhe
 An dud yaouank 've diskaret.

Gwelet em eus dindan ar spernen
 Eur plac'hig beuet 'n he daerou,
 An avel a daole 'n he c'herc'hen
 Dizeliadur gwenn ar bleuniou;
 Kalon ar Vreizadez 'ca, slouaz,
 Bec'hiet gant eun anken garo:
 Klevet 'deus ar c'hleier o son glaz
 D'he mignon ker a zo maro!

Er memes lec'h, a boan ma 'zo bloa,
 En disheol ar bleun spern ken kaer
 Ar plac'hig kêz a gane gant joa,
 E-kichen he dous servijer.
 Kaeran tra ec'h eo ar garante
 Harpet dalc'umat gant ar furnez!
 Daoust ma vev an den er baourente,
 'N e galon 'chom c'hoaz levezet.

Meur a durzunel 'zo bet tizet
 Pa deue o far da vervel,
 Meur a goulmig koant, het dilezet,
 'Nij seder dre vro Breiz-Izel...
 Oh! plac'hig tener, da anken vras
 Gant amzer ive 'dremeno,
 Ha dindan bleuniou ar spern gwenn c'hoaz,
 Eun de, marteze, te 'gano!

Eur bloa goude, ar memes spernen,
 Bleuniet adarre en peb brank,
 A wel dindan he bolz o tremen
 Korf maro ar plac'hig yaouank...
 Eun aezennig skanv 'deus diskaret
 War an arched bleun spern dispar,
 Ar vamm a heuilh he merc'h d'ar vered
 En eur skuilh daerou a c'hlac'har!

Tost d'an iliz koz gwelet e ve,
 En disheol brankou eur spernen,
 Daou ve 'zo warne bleuniou neve,